

(30, suite)

## Ar Marmous haq ar C'harz.

Allegoric.

Var ton : On dit partout que j'aime.

Birvigen goelloc'h scoliou  
 Ne gavo serten tud  
 Erit are ariziou  
 A ro deomp ar chatal mud.  
 Ar marmous en disquezio ;  
 Evesait brema ;

(31) Mes ar scol a rai dezgo,  
 A dise o flêma.

Red eo parlant anezha  
 Haq eus a euy dra fin  
 A vez tamallet dezha  
 Evel euy dro indin.  
 Ar Marmous a imito  
 Ar pey a rai euy all ;  
 Mes e banchant zo ato  
 Clasq ober troyou fal.

An deiz-al en eur g'eg'in,  
 Hep ober calz a van,  
 E velas poarza qistin,  
 Haq o golo en tan ;  
 Sonch en doa da imita  
 Ar pey en doa quelet ;  
 Pebes repas evita !

(32) Debri qistin grillet !

Neb a boarze ar c'histin  
 En doa pinsetezou,  
 Haq o zenne qer milin,

Hep scaota e veudou ;  
 Ar Marmous a zell ountân,  
 Haq a zonch goudeze,  
 Pa ne vije nemetân,  
 G'eg'inat evelse.

Evel ma cave ar Marmous  
 G'oloët ar g'eg'in,  
 Eza qempen ha didrous  
 D'ar zac'hadou qistin.  
 Quelet en doa e c'horen,  
 Haq er c'havas tîmat ;  
 Ha crapa en eur quchen,  
 Ha redet d'o foarzat.

(33) Lezet a ra manifiq  
 Ar c'histin da boarzat,  
 Chom a ra c'hoas eur c'heviq  
 Anter-zerret ervat ;  
 N'ey devoa qen compagneuz  
 Nemet eur c'harziq bris,  
 Eus an dud ne voa nicun,  
 Cousquet e voant ha scuis.

Lezet en devoa ganto  
 An amzer da boarzat,  
 Mont a raz d'entent outo  
 Ha d'ober e govat ;  
 Ponner ar Pinsetezou  
 Haq ar c'hevion devet ;

Am da zêvi e batou,  
En em gav goal nec'het.

El leac'h en em chagrina,  
E saill d'abord d'ar C'haz;  
Ar C'haz a gomans crena,  
Mar crenas biscoas:

(34)

E batou a fornisas  
D'o zenna eus an tan;  
Meur a vech e c'harmas,  
Ar marmous ne ra van.

Setu arze ta, portret,  
Epad ar brezel-mañ,  
Setu arze o portret,  
Sellit outa bremañ.

Gistin pouz a vez debret,  
C'houi a ro ho patou;  
C'houi eo ar c'hizier scaotet:  
Divinit va c'homzou.

Dat flolibus feles, membra cremenda lyrae.

(Vol. II, p. 30-34.)